

**DCL**  
**Le Diplôme  
de Compétence  
en Langue**  
[www.education.gouv.fr/dcl](http://www.education.gouv.fr/dcl)



# BRETON

Samedi 19 mars 2016

## Mise en situation

et

## Dossier documentaire

|   |   |                   |
|---|---|-------------------|
| Mise en situation du candidat<br>Setu piv oc'h hag ar pezh ho peus d'ober                   |   | page 2 / pajenn 2 |
|  Diell 1 | Danevell obererezh 2015 Stalig ar mirdi | page 3 / pajenn 3 |
|  Diell 2 | Ti Larnicol                             | page 4 / pajenn 4 |

## **Setu piv oc'h hag ar pezh ho peus d'ober Mise en situation**

### **Kris Korfmat** oc'h.

Emaoc'h e penn stalig mirdi Kompagnunezh an Indez e Porzh-Loeiz. Evit lidañ 350 vloaz Kompagnuniez an Indez e Bro An Oriant eo bet goulennet gant kuzul-merañ ar mirdi ijinañ ur produ evit skeudenniñ al liammoù etre Breizh hag Azia. Ha fellout a ra dezhañ kenlabourat gant ur chokolader war ar raktres-mañ.

Rakdibabet zo bet daou zen brudet ha ret eo deoc'h dibab unan anezhe. Evit gouzout hiroc'h hag ober ho soñj da vat e pellgomzoc'h da Ivonig Ar Gov hag a ren ar mirdi.

Da c'houde e skrivoc'h un notenn evit kinnig ho tibab d'ar c'huzul-merañ.

### **Vous êtes Kris Corfmat.**

Vous êtes responsable de la boutique du musée de la Compagnie des Indes à Port-Louis. Pour fêter les 350 ans de la Compagnie des Indes dans le pays de Lorient, le conseil d'administration du musée a demandé la confection d'un produit symbolisant les liens entre la Bretagne et l'Asie. Il a décidé de travailler avec un chocolatier sur ce dossier.

Deux personnalités ont été préselectionnées et vous devez en choisir une. Pour en savoir plus et faire votre choix, vous téléphonerez à Ivonig Le Goff, qui dirige le musée.

Puis vous rédigerez une note pour présenter votre choix au conseil d'administration du musée.

**Diell 1****Mirdi****Kompagnunezh an Indez****Porzh-Loeiz****Danevell obererezh 2015  
Stalig ar mirdi****1) Ar pratikoù :**

Ur c'hresk bras a weladennerien a zo bet gant lid tregont vloaz ar mirdi ar bloaz tremenet. 70 000 a dud a zo deuet da weladenniñ diskouezadeg ar mirdi pa ne oa ket 'met 67 000 ar bloaz kent, ar pezh en deus lakaet gounidoù ar stal da greskiñ ivez.

E 2015 ez eus bet kalz a estrañjerien evel kustum. Saozon dreist-holl (23%), Alamanted (19%), Beljiz (16%), Spagnoliz (11%), Japaniz (4%) hag evit ar wezh kentañ Sinaiz (2%). Gant an Alamanted hag ar Saozon e vez dispignet ar muiañ er stalig, war-dro 8€ dre familh.

**2) Ar produioù :**

Ar bloaz-mañ hon eus lakaet war-wel ar porselennoù gant daou zastumad nevez (Imari ha Glas ha gwenn). Gwerzhet zo bet kalz a listri met chom a ra podoù laezh. A-benn ar bloaz o tont e vefe mat kinnig pri-gwer ouzhpenn.



Dre vras hon eus gwerzhet levrioù evit ar vugale ha levrioù arz. Diaesoc'h eo gwerzhañ levrioù arbennik.

Kinniget zo bet spisoù (kanel, kraoñ muskad, vanilhez Bourbon, tachoù-jenofl), te, chokolad. Ar meskaj te « Heol an Orient » graet a-ratozh evit ar mirdi zo bet gwerzhet ar muiañ. Astenn ar c'hinnig gwerzhañ boued zo bet goulennet gant kalz a weladennerien. Lod a vefe laouen da brenañ gwispid ha lod arall a c'houlenn a vefe brasaet ar c'hinnig chokolad. Setu perak e c'hellfemp profitañ eus lid an 350 vloaz evit kinnig un dra nevez war an dachenn-se.

**3) An implijidi :**

Kris Korfmt a zo bet lakaet e penn ar stal ar bloaz-mañ hag implijet a zo bet ur studierez e-pad an hañv.

**Diell 2 : Ti Larnicol**



# TI LARNICOL



GWASTILLI

## Un tamm istoer...

Krouet eo Ti Georges Larnicol e Breizh ha razh e broduioù zo savet c'hoazh e Mêlwenn.

Àr roudoù e dad pastezour e tivizas monet Georges d'an oad a 30 vlez, goude studioù arz.

Er blezioù 80 e tigoras e stal pastezerezh gentañ e Kemper.

Stalioù arall en deus digoret goude e pep lec'h e Breizh hag e komioù arall e Bro-C'hall. Unan a vo digoret e Londrez 'benn blez.

Goude ur veaj e Sri Lanka en deus liammet darempredoù get produourion spisoù ha daet soñj dezhañ monet pelloc'h é kannig rekipeoù nevez.

## Ampartiz hag ijin

A-c'houde 1993 a p'en deus tapet e diti a wellañ *micherour Frañs* ne ra nemet krouiñ produioù souezhusoc'h-souezhus.

Awenet get Breizh digor àr ar bed e kannig produioù a galite evit an holl. Nend eus ket aon da veskiñ sivi Plougastell get koumin peotramant avaloù get pebr.

Un drugar eo e gouignoù Breizh saourus, strakus ha teuzus, e vakaronioù sontil o frondoù hag e lipouserezh chokolad.

Ne vern an degouezh e kavoc'h e ti Larnicol peadra da roiñ joa d'ho kalon.




KOUIGN-AMANN



GWISPID



CHOKOLAD




hor stalioù

Hor rekipeoù



Mont e darempred

paemant suraet



deroadur e 48 euriad

